

22

Kanaouen an election legislative

a labour hon gouarnemancho koz

1

Bretoned Breiz-Izel, di dostet da gleved,
Da jilao kana eur zon a zo nevez komposet,
Da jilao kana eur zon a nevez komposet
War sujet a electionnou ag a zo dremenet.

2

O na da un war uguen dimeuz a vis here
Oa guelved tout ar Fransijen da voti a dare.
Dimeus eur bloa war uguen, kouls paotred 'vel merhet,
Nag evamp beb guelved tout da hanvie a deputeed.

3

Ar groz vras dimeus an dud a oa bed a voti,
Kar bean oa un interest, evit pep hini i barti.
O ia c'bars nom hanton e oa peder listen
A bean oa da choas deus diou ru a diou wen.

4

Pad an deus oa in dud an non patienti
A klask g'out patenti ne a honeche ar barti
E ben deg eur deuz a noz oa bet a resultio
Hag oa bet hanvet dimp o tout ar paroujo.

5

Met kredet mad a hanno, kals a oa bet stoket
Pa guir ar communisted partout na goneet.
Bars nomp hanton deus mille moez muoh 'vit a real
Ken kouls war a M. R. P. evel war a radical.

6

Otrone ker oanket chomet da zigori o gueno
Pa dao gwelet a resultat a klevet ar helo,
Partiet oant dar guer a pep hini di loch,
Sur a oalh oanket in zell na da gavet ar boch.

7

Mi o ped koz a ioank da jilao a hanno
Nag a han da laret dac'h, o ia o neubet komjo
Na non trompet ket ma keret gant ar communisted
Na gommeret ket a ne 'vit bean voyouet.

8

Na gommered ket a ne 'vit bean voyouet,
A renez zo tud a vel d'oc'h, bemde a labouret
Labourat a honnestis, a rekomp ober bemde
Eben delhen eur tamm boet, deur vreg, dar vugale.

9

A houi tadou a mamou, non lakat da comprenne
Na vefet-ket dominet, gant o neubeud Fransijen,
Pad ar brezel peus goelet, ia a re penvidie,
A tibi gateaux, bara guen, a kasi tout ar hig.

10

Pa teuec'h aman in ker, da glask eur dra benaket
Partout vije laret d'ac'h, aman neuz man a bet,
Digaset-di eur tamm bleud guen, aman pe eur poulet,
Setu aze, labourerien, penoz oa o toare.

11

Tout a traou roec'h da n'otro, ia deuz tre o toarn,
Hoas a zikouret a ne, da zonet do gouarn
Na da houvorni ar vro, enep domp liberte,
Jilaouet hannou ar vad, ia groeg a bugale.

12

Peus ket komprened, bars ar vro zo bet eur lahadeg
Ma vije chomed hoaz daou viz a piye gouveet,
Met heurusamand ar bed holl, ia ma neuz comprenet,
Ne oa ket ken eur vesson, da vean gouarnet.

13

Labourerien groz ar France, dac'h a deuz discouet
Ag a deuz roed o moez, tout dar communisted,
Mez gwir, a he anomp farouz, evel partout a lec'hall,
Penoz ar commuisted, neuz tout ar sio fall.

14

A koulscoude a reze oa tud, a lakeo eurs abarz ar vro,
Ia dre nespert da noblenz, o na do kamarado
Mais ober a re in Vrance, dre nespert dar veilleien,
Da baotred a drapeau guen, doujan var o sorchen.

15

Met allas, non trompi a reont, a zioas a noblenz
Sonjal gant o vri treitour, dont da houarni Vrance,
Arog ar brezel a memb gouelt ar gouarnenmenchi
A cheri tout a arhant, ag a versant o bro.

16

Bars eur bla nao a treigond, mi gred a memp gouelet
Penoz a voamp guerzed tout, na da Allemanted,
Gered oa tout a armee, duze barz ar Belgique,
Met unanic benaket, a na gallet dont kuit.

17

Evel eur vanden louined, oant kast da Allemagne,
A aotronez oa deut dar guer, da evou ar champagne,
Ag in pad pevar bla enter, a hint bed enan a iun
Kaeite oa a aotronez ar guer a ober o fortune.

18

Kar goud a red kencouls a mi gant konverse zo bet gret
Ia ebarz nomp varouz ni, gand a allemanted
O ia, tout ar boissonniou mad, barz no horff zo bed ed
Evid ober eur casse-crouete, o gand a uio friter.

Payet oa a occupant, pomb kant million bemde
Do zevasti dim omp bro, a lahou omp bugale,
Tanou a lahou a reond, lec'h me oa patriotet,
A hoaz a lared fed di, oa gentill ar bochet.

Med eur equipe eoa in Vrance, ag oa ive payet
Da versan ar fransijen, na da allemanted,
Eur equipe oa dreaze, hanvet oa gand Vichy,
Ag o halon a no hreïs, a nom hever oa cri.

Lahat, privou ar vugale, o ia barz ar herio
Evit ober o fortune, a kargan o godello,
Ag a rese hidu a de, critique ar communisted,
O, car goud mad reont, ar lezeno vo chanchet.

Nan, na neusket a reson, evidomp labourerien,
O memeuz rum oar an douar ober profitourien,
Bep zul a heont da vord ar mor, o gand o hotaou,
A mimp a vo a esklavet, a labourat ar parkou.

O nag a lardan louinned, ag a cheri a ned
Setu aze a differenz, zo tre an dud oar ar bed
Ar labourerien a hamp, a zo tud a valchance
Memp ket esomp na goulo, na keneubed a essence.

O pillet a ve ar lann, bemde a hep goulo,
Keite ave aotronet ker, a hoari ar karto
Ag e spen draze hoaz, o aman barz in ker
Pad an noz ve allumed, o dimp ar goller.

Sclerigened a ve dimp, kasi tout ar ruo
A houi a ve oar ar maës, a patogi ar poulo,
A pad ar brezel alliës, an'otro vije ket kontent,
Gasec'h ket traou c'houal a draou, da ravitaillement.

An otronet oa soutenet, gand ar gouarnement,
Ag alliës barz kreïs ar feurme, a houle changement,
Na gave ket eoa ker a oac'h, o nan a verreri,
Patto sec'h hep eur baneh gist, zo mad dac'h da zibi.

A setu aze penoz, a homp ni kemerret,
Ar labourerien a hamp, o gand an aotronet,
Med ar namzer hamp da renn, dindan a Republique,
Ar paour no i zroajou, kencouls ag eur pinvic.

Dindan ar noblicite, ag ar oll veilleïen,
Ar labourerien a hamp, eoa esclavajourien,
Ar paour, barz in amzer goz na oa mad da netra
Med da labourat noz de, bars ni doul da soucha.

Kasset vijem da labourat, rog a vije sclair eur de,
A bet hon ober ma hunan evit deg guennec bemde
O dar houlse a moamp poan a honnit omp bara
Goasoc'h evit ar louined, a laboremb bemde.

Daou-uguen la zo deja aboue hon labourat
A neuz hini bed a hanch, da henviou ma stad
A mar zo un benaket, henvie ma position,
Neusket med prenan eur fonz, neusket eom eur million.

Me na ranket kals a fout, na na nonket gened,
O pension a re goz, a diou ma von touched,
O pension a re goz, breman a vo touched
A leusket a re yoank, o na da labourret.

Na neusket ar raison, na mimp barz no goznie,
Lakefomp an aotronez, o na domp kommandi
Na da kommandi ar vro, a henep domp bare,
Chilaouet mad a hannou, ia, groeg a bugale.

Sort ar labourer pelzo a gleche bean goueleet,
O penevet omp bro, dimp a zo bet guerzed,
Ruinet a he dimp omp bro, o ia gand ar brezel
Evit harz ar labourer, da zond da non zével.

Laket a ve droëjou neve, o ia ewar tout ar traou,
War ar butun, ar cafe, ag ive ar timchaou,
Leac'h laket électricite, dac'houi war ar campagne
A he kasset da Franco, o duze dan Espagne.

A setu aze labour, omp gouarnement,
Laket ar arhent dor brezel, evit ruinan ar vro,
Evit dalhen a hamp tout, o ia barz ar vizer
A hoaz pa hamp da voti, na ne velomp ket sclair.

Kauseet ve dimp ken brao, gand ar gonterrien vlour,
Pe vint entreet ar gamp, a hint tout tud treitour,
Me o ped tadou a mamou, non laket da comprenn
A homan na neo ket kin, nan eur vue da renn.

Sonjet barz o pugale, pere a zo a sevel,
Ma vefe red de mont c'hoas, o dober ar brezel
A viskoaz a lared di, a zo bet brezelo
Med da hortos dar bevien, a ve torred o gueno.

Na neus nimet ar brezel, zigor dim hon daoulaguet
Pa sonjem barz nomp zud varo, ag omp amzer gollet,
Mais kri a he a galon, diou lagat a ouelfe
O na donet dom lahou, goude labourat bemde.

Sonjet barz ar varquijen, biscouaz deus labourret
Met pourmen bars an autoo dibi bara goneet
Neket speret a vank di evit donet da rima,
Met ma dorn woar ma vluen, nag a teu da scuisa.

Ar zon man zo composet, ganiman ma hunan,
Eur ober eur horniet butun pa ve dèbed ma hoan,
Mar fel dec'h goud a klevet, piou a neuz y komposet,
René LE GAC eo ma hano, a chom barz in Callec.